

(341)
suite

Chanson

Compozet var sujet ar Butun.

Var ton Margodig.

Me o supli, tud yaouanq, da laqat ho speret
Erit clêvet eur chanson a nevez compozet,
Yrêt var sujet ar Butun hag ar butunerien,
Hep cavet intansion da zont da choqi den.

Clasqet emeus ar sujet, hag e meusan cavet,
Da gompzi eur chanson evit ar Vretonet,
Da zont d'o tivertisa, entrezoc'h, tud yaouanq;
Disqit-hi, bras ha bian, neus netra insolant.

(342)

Areti rân va speret evit dont da gompren
Var ar vuez deplorabl ra cals a vutunerien;
Rac pa fumont alies gant tamou bibenou,
Int en danger da zêvi o fri hag o g'inou.

Clasqet e vo pibenou demeus ar re gomun,
Da venaji an arc'hant evit prena butun;
Ha pa ve toret ar c'horn, ma na ve get butun,
E clasgo unay expres gent evit chom da yun.

Clasqit ta, butunerien, ardon evit fumi
Yan a voar ober ur c'horn gant un tam darbot pri;
Neuze e clasgo un troad evit laqat ennân,
Hag e rostfe e c'hinou, Yan a fumo gantân.

En escopti a Venet ha var dro Landernô,
E reont gormiel butun, gant un tamic colo;
Gormiel du gant treit aleg, an draze go comun,
Int a esper[an] o arc'hant evit prena butun.

(343)

E d'emper, e Pontivi, Lanion, Sant-Briec,
Eo comanset da fumi ar grag'ez, ar merc'hed;

104

O velet bras ha bian o fumi dre ar ruyou,
O deus sonjet gant eur biben dont da orni ho g'inou.

Merc'het cōs ha re yaouanq, graq'ez, intanvezet,
Redeg a r'ont ol brema da glasq butun mog'et;
Espem a reont brēma cafe ha jigoden,
Evit monet da brema dar foar peb a biben.

Prenet o deveus ive gardepipr ha tiren,
Goestou tont ar re gaera, gant chadenou melen,
Ha blag'ēnou blei-marin, couls ha pinsetezou,
Hag e pourmenont fier o c'horn en o g'inou.

Bep sul, bep gouel ordinal, o vont d'an ofern bret,
En em asambll bandeñou e qichen ar vèret;
Hag e vent eno o fumi evel an dragonet,
Qen o deus mez an erac'h serten eus o quelet.

(344)

Clevit un histoar plezant p'ini zo aruet
gant ur vrac'h gos o vonet da nosvez nedelec,
A voe en hostaleri o fumi he fiben,
Pa glevas ar c'hloc'h o son evit an oferen.

Mont a ras en eur fumi bete mur ar vèret,
An tan a grog er butun p'edeus an desturnet;
An ofisou a voa hir, hi a chomas cousquet,
An tan bars en e godel a zo bet alumet.

Gement a voa en ilis anem g'ef estonet,
O velet na bade den eno gant ar mog'et;
Ha pa c'hejont da velet, ar vrac'h a voa cousquet,
An anter eus e dillat warrai a voa dêvet.

Peg'ement a valeurion oc'heus-u bet quelet,
Zo aruet gant an tan aboe m'oc'h var ar bed;
Rac se ta laqit eves, nen em fiet get re,
Gant aon na vec'h surpronet couls en nos hag en de.

(345)

Tostait brema da glêvet un disput a zo bet
Neus get pel gant daou vignon, pere zo n'em facket;
O tont o daou da barlant eus ar butunerien,

Et cavet intension da zroug - prezeg a zen .

Evel ma ouzoc'h erfad , pep den en deus e c'hout ,
 Lod a c'houlenn da fumi , darn a g'emer en poultre :
 Pepini erve e stat hag e opinion ,
 Ze ne ra netra da zen , mar dezir e galon .

An daou vignon - ma serten , pere n'em garie mat ,
 i vint en hostaliri oc'h eva boutaillat ;
 Erit tremen an amzer hag en em amuzi ,
 Unan gant butun ar c'horn , un al gant butun fri .

(346) An hini acustumet gant ar butun mog'et ,
 E hostillou var an dol en deveus bet tennet ;
 Egile a lavaras : hounes zo eur vicher !
 Red eo did prena eur marc'h da gas d'ostillou d'ar g'er .

Tavit prest , va c'hamarad ; credit , n'am fachit get ,
 Va hostillou a zo din pa o meuse paeet ;
 Pa vez er parq e labourat , ha pa en be butun ,
 Ma nam be va hostillou , me a rang chom da yun .

Me voar erfad , va mignon , ezeo quir an draze ,
 Re ambaras a gavân zo gant ar vicher ze ;
 Gement al eus a arc'hant zo rest dide cavet ,
 Me voar ober daou , tri bloas gant ur voest pemp queñec .

Petra servich lavaret , me na estimân get
 Eur butuner obstinet ma estar ne dalget
 Peadra vit entêri pa deu ar maro dezân ,
 Erit laqât un archet hag oferen gantân .

(347) Tao dinne , va c'hamarad , ro peoc'h gant da gomzou ,
 Memeus un dabatieren a dal mui vid da vadoù ,
 Memeus eun dabatieren a dal mui a vadoù
 Erit na dal en antier da zac'had hostillou .

Me o ped , va c'hamarad , na zeut get d'am choqi ,
 Quel estimân va micher vit nan deo oc'h hini ;
 M'alfec'h quelet o fuzach evel m'eo barbouillet ,
 Hag ar butun o tiver eus ho fri en o peg .

Me za da zac'ha va fri, goude ni zispute,
Ar feiz a zo aprouvet gant qement zo er vro;
Rac va micher a zo nobl, oc'h hini nañ des qet,
C'houi n'ellet qet butuni partout elec'h ma c'het.

Piou zo capabl d'am ampech, p'am bo c'hoant da fumi?
Butun ameus hag hac'hant hep goulen gant hini:
Digasit din, eun tam tan, ma rin eur c'hornedat,
Comans a ran da facha ouzoc'h, va c'hamarad.

[Arabes]

Abat eo dec'h, va mignon, donet d'ez em facha,
Ar virione a fel din brema da ziscleria;
Me a vutuno serten elec'h ne refet qet,
N'em bezo permission, ha c'houi n'o pezo qet.

(348)

Pa vez en ofis divin epad an oferen,
Me a all qemer butun be vech ma trio em pen;
E qement compagneues, bete er gomedij,
Me vel an ol dudjentel o qemer butun fri.

Ha te ne vez qet lezel da fumi cornadou,
Abalamour d'ar mog'et a zeu aus da c'hinou;
Te dol begadou mog'et zo capabl da dalla
Pe da laqat hor c'halon da zont da fatiga.

Caer ec'heus va decrial, me a fumo bepret,
Entre ma vin ez bue me n'ez dilezjin qet;
Car vad a ra d'am c'halon hag ive d'am speret,
Lomzit a neb a garo, me a fumo bepret.

(253)

Rézon ec'heus, va mignon, var sujet qementse,
Mes dioual a binvidiq da zont paour adare;
Bep sul e renqes prena diou pe deir anduillen,
Qerniel a dores bep bla ousten trégont dousen.

Mes gant va zabatieren me a ra mestrezet,
Hag en pep compagneuz em be mignonezet:
Oute neñ dout qet capabl da ober da fortun,
Rac te chase ar merc'het gant ar mog'et butun.

Poent e cavan finita: adieu, va c'hamarad;

107

Collet emeus ganede brêma me vel erfad ;
Ret eo laqat an disput on eus grêt var baper,
Erit laqat da c'hoarzin Gerne, Leon, Treger.

(254) Ar Butun a zo hanvet louzon ar basiantet,
Erit tremen ar chagrin, conservi ar yec'het :
Er g'er eus a Vontroulez ez eus etabliset
Eur Manufactur, gant ar roue aprouvet.

(Vol. I, p. 341-348 et p. 253-254)